


# KANTIK SANT RIAGAT

DISKAN

Kanomp hirio gant levez  
 Meuleudi patron hor parrez  
 Kassomp dezhan hor pedennou  
 Evit m'hon hencho d'an Envou } *bis.*



1  
 Triagiz bezit leun a joa  
 Da gaout eun iliz ar gaera  
 Savet en honor d'ho patron  
 Deuit d'her pedi a vir galon. } *bis.*

2  
 En Iverson e ze ganet  
 Ag Riagat e voe hanvel  
 Dreist an honor hag an danvez  
 E klaskas hent ar zantelez. } *bis.*

3  
 Yaouank e treuzas ar mor bras  
 E Breiz-Izel e touraras  
 Kalzik menec'h en heuil timad  
 E porzik mor Léchiagat. } *bis.*

4  
 Savet en deuz eun abatti  
 En honor d'ar Verc'hez Vari  
 Pedi Doué ag ar Verc'hez  
 Setu eno roll e vuez. } *bis.*

5  
 Eur feunteunnik en deuz toulet  
 A c'heller c'hoaz hirio guelet  
 Enep poaniou a bep doare  
 Kalz anezhi deuz bet pare. } *bis.*

6  
 Feunteunnik skler sant Riagat  
 Ennoc'h 'zo dour euz an dibab  
 Roit deomp didor en hor poaniou  
 Nerz da vouga hor gwal dechou. } *bis.*

7  
 Redit sioulik er goaziou  
 En em ledit var ar prajou  
 'vel grac Doué en em asten  
 Var nep er galv dre ar beden. } *bis.*

8  
 Patron santel d'hoc'h ni bromet  
 Hed hor buez Doué karet  
 Heulia ato e lezennou  
 Labourat start' vit an Envou. } *bis.*

9  
 D'har zul e zaïmp d'an ofiso u  
 D'an oferen, d'ar gousperou  
 Pep labour 'lezimp a gostez,  
 'Vit kemer skouer var o puez. } *bis.*

10  
 Bem lez d'ha noz ag d'ar mintin  
 Ni a ielo var hon daoulin  
 Oll e lavarimp hor peden  
 Evel m'eo dever pep Kristen. } *bis.*

11  
 Ni ielo da zakramanti  
 Gant karantez ag gant dudi  
 Evit digemer ar graçou  
 Hor savo eun deiz d'an Envou. } *bis.*

12  
 Er baradoz d'ha virviken  
 Evuruz bras en ho kichen  
 Ni a bedo a galon vad  
 'Vit tud parrez Treffiagat. } *bis.*

Aotre da voulla

Kemper, 28 a viz Maë 1936

P. JONCOUR, *Vikel oras.*

Voulet Ty ROLLAND, Pont-Abbat.